



E pardon ar Sonerien, dirak chapel St-Herve e Gourin.

PHOTO « COURRIER »

# Bleun-Brug

Niv. 84 (Miziek-Mensuel)  
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

HERE 1955

## TAOLIT EVEZ MAT

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1955 ?

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.  
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell d'eoc'h beza ezel eus ar **Bleun-Brug** pe rei d'eomp skoazell, kasit ho skodenn da :

**V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,  
C. C. P. 544.22 Nantes.**

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

## TAOLENN

|                                                        |    |
|--------------------------------------------------------|----|
| Goude goueliou Landivizio, gant V. Fave .....          | 1  |
| Prezegenn oferenn-bred ar Bleun-Brug .....             | 3  |
| Hent hir, gant Evnig Penn-ar-C'hoad .....              | 7  |
| An Tad Santel hag ar Zevenaduriou, gant V. Fave .....  | 8  |
| Eun droiad e Bro-Eire, gant Moualc'h ar Sklerder ..... | 10 |
| Embannaduriou .....                                    | 12 |
| Priz kenta prezegerezh Landi, gant J.-Y. Letty .....   | 13 |
| Saout Lambaol, gant Mab an Dig .....                   | 14 |
| A travers la Presse, gant Herve an Du .....            | 16 |
| Keleier .....                                          | 17 |
| Bannielou Lambaol .....                                | 18 |

## HOR SKOL DRE LIZER

Brasoc'h brasa bemdez eo niver ar re a fel d'ezo beza desket war hor yez. C'houi hag a oar brezoneg ; c'houi hag a oar lenn brezoneg, ha gouzout a rit her skriva ?

Evit her gouzout, heuilhit hor skol dre lizer.

Skrivit da : **V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Fin. C.C.P. 544.22 Nantes.**

GOULENNIT DIGANT AR MEMES HINI :

Yez hon Tadou (Méthode nouvelle de Breton) : 345 fr. + 45 fr. (port).


Le Breton par l'image (evit ho pugale) : 250 fr. + 30 fr.

Me a zesk brezoneg : 250 fr. franco.

Buhez an Aotrou Perrot : 850 fr. + 45 fr.

Histoire de Bretagne, an Ao. Poisson : 750 fr. + 45 fr.

Kofichennou ar Ster Aon : 300 fr. + 45 fr.



BIBLIOTHEQUE  
QUIMPER  
DIOCESAINE

## Goude Goueliou Landivizio

50 vloaz 'zo m'eo bet savet ar « Bleun-Brug », deuet eo hon emzav d'an oad gour hep koza. Pet ha pet a emzavioù ha ne baktont gwech ebet an oad gour ! pet he pet all a zebant beza ganet koz !

Bleun-Brug Landi a zo bet Bleun-Brug ar bennozh hag ar meuleudi ; d'an Aotrou Perrot, diazeour an emgleo, daoust d'ar mud m'eo chomet an darn vuia eus ar c'hazetennou diwar e benn ; d'an Aotrou Doue ivez en deus skoazellet an dud kalonek o deus dispignet o amzer hag o arc'hant abaoe hanter kant vloaz evit digeri hent d'ar B.B. hag e startaat war e gilhorou a vloarez da vloarez.

Klevet hon eus danevelli « istor vuzudus » ar B.B. : e amzerioù kenta, ar barradoù dirollet warnañ ha dreist-holl hini ar bloavez 1927, amzer diweza an Ao. Perrot, an dazorc'hidigezh goude ar brezel.

Re alies ar gevier a vez lezet da redek hag ar wirionez eo a gav ar muia avel a-benn. Er bloaz-mañ adarre ez eus bet kavet babouzerien da stlepel o binim evit klask louza ar Bleun-Brug. Daoust ha peoc'h a vezo a-benn ar fin ? En despet da bep tra eskibien Breiz, en o fenn an Aotrou Kardinal Roques, arc'heskob Breiz, Tadou abaded manatioù bras Breiz n'o deus ket taolet evez ouz lavarioù ar falz-doktored ; Aotrou Prefed Kemper kennebeut, na kannaded ar vro e Paris gant eur bern pennadurezioù all da heul. Gant goueliou an hanter kant vloaz, ar Bleun-Brug en deus bet « lizeri a noblañs » sinet gant anoioù a bouez bras.

Stignomp ar goueliou eta, avel enno kement ha ma karor hag eeun d'an doun-vor !

Istor vuzudus... Perak eta e sach ar Bleun-Brug evel-se an dud, e n'eus fors pe gorn eus Breiz ! N'eo ket c'hoaz kemend-all al lodenn folklor beo a ro tro d'eomp da welet an dra-se a gaver e goueliou bras Kerne hag e lec'h all... Eun dra bennak dounnoc'h a zo : amañ e santer muioc'h eget e neblec'h all, ene Breiz o tridal, ene Kristen Breiz.

Kavet am eus ivez gwellaen gant ar gwiskamanchou. E keit ha ma ne zouge hor yaouankizou nemet gwiskamanchou bet douget gant o zud koz ha miret en armelioù gant boulou-mited n'oa ket tro da gredi e

chomfent stag ouz gizioù ar vro. Met setu ma stanka bemdez ar c'hel-  
c'hiou hag ar bagadoù a zoug gwiskamañchou nevez, graet evito ha  
diouto evel Gwengamp, Boulvriag, Lanuon, Montroulez, Kastell, Plou-  
gerne... ha pet all... Muioc'h a fouge a vez er yaouankizou gant dilha-  
jou nevez ha da gredi eo e tougint anezo — goude beza o frenet —  
n'eo ket hepkén evit ar gouelioù folklored met a hent-all ivez pa  
vezint en o c'haer. An dilhajoù brao n'int ket graet evit diskouez nemet-  
kén, an dra-se a zo mat evit « maninkinou » Paris, met evit beza gwis-  
ket evit ma vo fichet an dén en enor d'eun dra bennak, en enor da  
Zoue d'ar vro, d'ar gerent pe d'an amezeien, en enor d'ar gened. War  
ar poent-se e vefe brao gwelet an dud a zired bep bloaz d'ar Bleun-  
Brug o kemeret int-i ivez, da geñver an dervez-se, dilhad ar vro en enor  
da Vreiz peogwir eo ar Bleun-Brug unañ eus gouelioù kaera Breiz.

Ar c'henstrivadegoù a zo unan eus lodennoù pouezusa gouelioù  
ar Bleun-Brug; eno e vez graet al labour dounna, rak ar yez, ar bre-  
zoneg eo banniel beo Breiz.

Ret e vefe poania dreist-holl gant ar prezegerezh ha kompren a ran  
an Itron de Rohan-Chabot pa zeu, etre kant sikour all, war zikour  
Kenstrivadeg ar prezegerezh. Eur paotr yaouank, eur plac'h yaouank hag  
o deus kemeret perz er genstrivadeg-se a zo gounezet da vat d'ar Bleun-  
Brug ha d'ar brezoneg. Peur eta e welimp 50 ha 100 a yaouankizou o  
rei o ano, kement anezo ma vefe ret dibaba en araok ar re wella dre  
gantou evit mont d'ar Bleun-Brug bras? Ne vefe ket diaes koulskoude!

#### KOMZOÙ AN AO. KARDINAL ROQUES.

Mat oa labour ar Bleun-Brug, mat he menoziou e penn kenta ar  
c'hantved, p'eo bet savet an emzao; mat ez int c'hoaz en dervez a  
hirio. En hon amzer eo ret koulskoude labourat ouspenn — ha da genta  
— war dachenn an oberou katolik. Ln daou emzav-se n'int ket graet  
evit ober gaou an eil ouz egile met evit en em skoazella hag ober labour  
pouezusoc'h ha talvoudusoc'h a ze.

V. F.



## Prezegenn oferenn-bred Bleun-Brug 1955

graet gant an Aotrou QUILLÉVÉRE, Person Plougerne

Meulet ra vezo e pep tra an Dreinded Sakr, Tab, Mab ha Spered Santel...

Aotrou Kardinal hag Arc'heskob Breiz,  
Aotrou n' Eskop Kemper ha Leon,  
Aotroued Eskibien hag Abbaded Enorus,  
Va breudeur ha va c'hoarezed kristen,

Hor parrezioù o deus an eurvad da welet, a vare da vare, beleien, fre-  
red, leanezed, priegoù kristen o tont da zaoulina e harz an aoterioù da  
lida o eured anterkant vloaz.

Dibuna a ra o spered o bloaveziou tremenet, hag o welet neuze  
frêsoù eget biskoaz, pegen brokus eo bet madelezh ha trugarez an  
Aotrou Doue en o c'heñver, e tarz, laouen ha nerzus, nann diwar beg  
o muzelloù, met eus pleg donna o c'halon ar « Magnificat », an « Te  
Deum », ar c'hantikou c'houeka a veuleudi hag an anaoudegez vat.

Ha neket an hevelep mennoziou eo o deus graet d'eomp kemer,  
en derveziou-mañ, henchou Keryann ha Landivizio, va Breudeur Ker,  
ni, bet luskellet e familh vras Breiz hag a zo stag, muioc'h pe nebeu-  
toc'h ouz emzav brudet ar Bleun-Brug, a lid, gant ar brasa sked, hirio  
deiz solanité hor Mamm-goz ken karet, Santez Anna, e eured 50 vloaz...

Ha n'omp ket deut amañ, Bretoned kristen ma z'omp, hor c'halo-  
nou leun-barr a anaoudegez vat, da genta ha dreist pep tra, da renta  
d'an Dreinded Sakr ar c'hloar, ar veuleudi a dleomp d'an Doue Holl-  
c'halloudek hon eus digantañ an holl vadou hon eus, d'an Doue ken  
karantezus en deus ar vadelez da ginnig, e pep amzer, d'ar rann-  
vroioù koulz ha d'ar broioù, tud dibabet gantañ, roet d'ezo gantañ ar  
pep red da c'hellout hentcha o c'henvroiz war aroudenn eun ar Wirio-  
nez, ar Garantez, ar Zantelez?

Dreizo, pa jomont izel a galon ha digabestr, pa vezont aketus d'é  
bedi, d'e zelaou, da veva kelennadurezh ha skouerioù e Aviel, eo e fell  
d'hor Zalver, meulet ra vezo, kenderc'hel, astenn labour bras ar Zilvi-  
digez oa digaset da ober war an douar pa gemeras buhez-den.

Awalc'h e vezo d'eomp, d'am meno, teurel eur zell berr war an  
hanter-kant vloaz tremenet, evesaat ouz ar frouez bleuniet ken puilh  
war an **hadenn virvidik** taolet e douar Sant-Nouga d'an 12 a viz Gwen-  
golo 1905, evit kompren gwelloc'h c'hoaz eo just hag onest d'eomp  
kana a greiz-kalon hor c'hantikou c'houeka a veuleudi, a anaoudegez  
vat, ha birvidikaat en hor c'halonou hor fiziañs e mandelezh an Aotrou  
Doue hag e amzer da zont hor bro.

1905. — Bloavez trubuilhus ma z'eus bet unan, glac'harus evit  
hor bro. Frañs, muioc'h c'hoaz martese evit hor Breiz Kristen.

Avelioù yud, c'houezet gant an drouk-spered hag e vevelien, o doa  
poulzet bugale ar Vamm-vro d'en em gia, d'en em zrailha an eil egile.  
Dizec'ha a raent mennoziou uhela ar c'halonou, eostou gwella ar parre-  
zioù.

Hogen, d'ar mare m'oa ken teñval ar goabrenn hag an arne en e  
wasa, d'ar mare m'edot o stleja er-maez eus o ziez hag eus ar vro,

evel torfetourien, leanezed, menec'h, Frered, o tiskar ar c'hroaziou, o tiberc'henna an Ilizou, leve an anaoun hag all ;

— d'ar mare ma veze difennet ouz beleien Breiz ober skol an Iliz d'ar vugale er yez desket ganto-war barlenn o mamm, prezeg an Aviel d'ar gristenien e brezoneg, entetet gant an holl hag a blije d'an holl ;

— d'ar mare ma veze klevet tud, dallet gant o ourgouilh ha gant o c'hasoni a-enep Iliz hor Zalver ha Breiz Kristen, o youc'hal da bep hekleo edo Feiz, yez ha gizioù hon Tadou o vont da veza diskaret evit mat ;

— d'ar mare ma venne kalz tud berrwelet fallgaloni ; eun den, eur beleg yaouank, tri bloaz belegiaj d'ezañ, lemm e spered, skrivagner ampart, koulz e galleg hag e brezoneg, tomm ha birvidik e galon, leun a fiziañs en Aotrou Doue, en e genvroiz hag e amzer da zont hor bro, a zavas e vouez, n'eo ket avat da deurel eol war an tan oa, na da bis-tiga dén na netra ;

Klevit kentoc'h : « Va mignoned, emezañ, d'eur strollad yaouankizou eus Sant-Nouga, ha ne gav ket d'eoc'h eo mall d'eomp sevel eun Emgleo da zibrada an eneou uheloc'h dreist ar fank, ar gevier, ar gasoni, ma teuy an dud d'en em gompren, d'en em glevet, da rei skoaz an eil d'egile evel gwir vreudeur ; — eum emglev e teskint dreizañ pegen karantezus eo an Aotrou Doue, p'en deus aozet d'eomp-ni, Breiziz, eur vro zispar, fiziet ennomp madou diniver ha dreist-priz, da lakat da dalvezout evit e c'hloar hag evit laouenât buhez an holl ; madou hag o deus graet eus ar c'horn douar-man unan eus ar c'haera a zo er bed ; madou hag o deus stummet ken brao, ken diroufenn, a-hed pemzek kant vloaz, spered ha kalon hon Tadou, m'o deus graet anezo unan eus ar pobladoù nerzusa ha leala a zo bet war an douar... Koumoul du a zo war feiz, koumoul du a zo war Breiz, gwir eo, met n'eus koumoulenn ebet, n'eus forz pegen du e vefe, hep eur vevenn arc'hant-tet gant an heol a zo a-dreñv ; ar c'houmoul du a dremenno, Feiz ha Breiz a skedo »...

Emañ savet **ar Bleun-Brug**. Lakaet en deus Aotrou Kure Sant-Nouga, **an Aotrou Perrot**, ar maen kenta ; diazezet eo gantañ war eur maen-korn divrall n'hell biken den na netra dont abenn anezañ : **Kroaz hor Zalver Jezuz-Krist, Feiz ha Breiz...**

Ha ne deu ket da wir, va Breudeur ker, ha n'eo ket deuet zoken e gomzou da wir ?

Tremenet eo an Tad, diazeour kalonek ar Bleun-Brug. Skrivet en doa en e levr « Buhez ar Zent » :

« **Mervel evit difenn gwirioù Doue, evel ar Verzerien, eo kaera maro a oufê da c'hortoz ; mervel o tifenn gwirioù ar Vro eo kaera hini a deu goude** »...

E bedennou, e binijennou, e skridoù, skouerioù e vuhez labourus ha karantezus a zo divarvel.

**An Emgleo**, diwanet warno, a **zalc'h** hag a **zalc'ho** ; a **zalc'h kristen**, evel m'eo bet savet ; a **zalc'ho kristen**, rak anez, neketa, e vije dianavezet gant an Tad e-unan da genta ha gant ar gwir Vretoned holl bepred a-unan gantañ. Ar Bleun-Brug, daoust d'an hanter-kant vloaz en deus, ha n'eo ket hirio yaouankoc'h, sederoc'h, nerzusoc'h eget biskoaz ?

Barnit hoc'h unan, va Breudeur ker. — Niverit, ma c'hellit hen ober, ar pobladoù tud a zo diredet a bep tu, a-hed an 50 vloaz treme-

net, da gemer perz er gouelioù dispar fardet gantañ e pep korn a Vreiz kristenien hag a zo distroet, bep wech, d'ar gêr, birvidikoc'h en o c'hreiz o c'harantez evit Doue hag evit Breiz.

Sonjit ive, hag evesait mat ouz al labourou pouezus ha frouezus meurbet, ha ne welit ket, hag e vefe re hir o displega hirio, labourou grêt didrous, gant kelaouen ar Bleun-Brug, ar skol dre lizer, ar c'helc'hou-studi hag ar bodadegoù a bep seurt a-hed an diskar-amzer hag ar goañv, lazou-kana hag all...

Gwelit amañ hirio ar yaouankizou, ken niverus, ken diroufenn o zal, o veza m'eo disklabez o c'halon. En o gwiskamanchoù breizek, ha n'eo ket eun dudi o gwelet, eun dudi evidomp-ni Bretoned, muioc'h c'hoaz, marteze, evit an divroidi ?

Lennit al levrioù, klevit ar c'hontadennoù kentelius ha plijus, ar gwerzioù, ar c'hantikou dreist-holl, enno, en eur brezoneg digemesk, kredennoù hon Tadou, kelenadurez hor Zent koz. Klevit c'hoaz ar ganerien, ar zonerien, c'hoarierien, ar gorollerien : ha ne red ket dreizo spered ar Varzed koz a ganas war gribenn pep roz ?

Goude beza gwelet eun daolenn ken buhezek ha ken frealzus, na d'it ket da gredi, va Breudeur ker, beza graet an dro da **holl danvez** ar Bleun-Brug. Pell ac'hano. Perlezennoù kalz presiusoc'h c'hoaz a sked lintrus war e gurunenn, met evit muzula ervat o zalvoudegez, eo red sevel uheloc'h c'hoaz, pignat e sklerijenn hag e liorz an Aotrou Doue, hon daoulagad troet wardu ar vuhez peurbadus ez omp holl krouet evit tizout anezi : perlezennoù ar feiz, warni o vleunia evel bokedou roz, ganto c'houez ar baradoz, holl vertuzioù hor Zent koz.

Livirit d'in bremañ, va Breudeur ker, ma n'eo ket ar Bleun-Brug, gant **e zavez founnus**, eun teñzor dispar da greñvaat, da binvidikaat hor bro garet Frañs, ha da rei muioc'h mui a sked d'hor Mamm Santel an Iliz ?

Ha n'eo ket eun tour-tan o lugerni, war pep tachenn a Vreiz a dra-zur, met ive a-dreuz Bro-C'hall ha zoken a-dreuz ar bed penn-da-benn.

Rak, her gouzout mat a rit, dindan skorn hag erc'h penn-uhela ar bed, koulz ha dindan heol bero ar c'hreisteiz, ha betek en enezennoù fuilhet amañ hag hont a-dreuz ar mor bras, e pep lec'h, eus ar Sav-Heol d'ar C'huz-Heol, ez eus **Bretoned kalonek**, ho pугale da veur a hini arc'hanoc'h, va breudeur, misionerien, frered, leanezed hag all o tibuna, oc'h ingala e-touez ar gouezidi, gant eun aket, eur garantez estlammus, an had birvidik dastumet ganto gwechall e bro o c'havel.

Unan eus koumoulennou dua an amzer a-vremañ, a lavare d'eomp hon Aotrou n' Eskop doujet ha karet Kemper ha Leon en e Lizer diweza a bastor, eo e teufe an den, e-lec'h sevel muioc'h mui wardu an Aotrou Doue, d'en en chadenna e-unan, o veza sklavour an traou nevez, an traou a vez dizoloet pe ijinet hirio, hag a zo, e gwirionez, pa evesaer mat, traou bet krouet evitañ a-holl viskoaz, gant an Doue en deus krouet pep tra.

Ac'hanta, da gaeat ouz an touellerez diaoulek-se, unan eus an doa-reou gwella, ha n'eo ket digeri muioc'h mui spered an den, tomm d'ezañ e galon, evel m'er poagn d'hen ober ar Bleun-Brug, o voaza anezañ da zigeri frankoc'h e zaoulagad war **kaerder**, hag **ive da-heul, war holl ezommoù** an dud a hirio ?

M'ho pefe c'hoaz, unan pe unan ac'hanoc'h, douetañs war danvez birvidik ar Bleun-Brug, neuze selaouit, da echui, komzou an Tad Santel ar Pab e-unan :

« Dans les pays chrétiens, dans les régions où la foi religieuse et la vie populaire forment encore aujourd'hui une unité composable à l'unité de l'âme et du corps, le folklore n'est pas une survivance curieuse d'une époque révolue, mais une manifestation de la vie actuelle qui reconnaît ce qu'elle doit au passé, tente de le continuer et de l'adapter intelligemment aux situations nouvelles. Grâce à l'activité des groupes folkloriques, de précieuses coutumes se maintiennent ou revivent.

« Aussi ne pouvons-nous que louer ceux qui, avec compétence et dévouement, s'appliquent à les aider, à diriger leurs efforts, à stimuler leurs initiatives et tous ceux qui leur apportent une collaboration directe.

« Puissiez-vous pénétrer toute la portée de votre rôle social. rendre aux hommes, saturés de divertissements bien souvent falsifiés et mécanisés, le goût d'un délassément riche des valeurs humaines les plus authentiques. »

Komzou Tad hon eneo int, va Breudeur ker. Sanailhomp anezo eta gant evez en hor Spered, pleustromp alies warno, pleustromp warno hirio dioustu, bremaik epad tro-Breiz ar Bleun-Brug ha prosession vras parrezioù Breiz. Gouest int, me 'sonj, da virvidikaat hor fizians ha d'hon dougenn da bedi c'houekoc'h evit hor bro.

Aotrou Kardinal, Aotroued Eskibien, gant ar brasa Feiz ha doujans ec'h anzavomp eo ganeoc'h c'houi eo emañ komzou Doue, alc'houez ar vuhez peurbadus. Ho kelennadurez, ni holl a fell d'eomp, neketa va Breudeur ker, he digemer hep rabati, hep daouhantera, hep klask dibab enni ar pezh a blij d'eomp ha teurel ar peurest er stal a-gostez... En he feiz eo e fell d'eomp he digemer, ha gwella ma c'hellomp, hon dorn dic'halloud e dorn galloudus hor Zalver, hini an Itron Varia ha santez Anna, **beva diouti hor vuhez pemdeziek hag hada, embann** anezi war an **holl dachennou**, tachenn ar familh hag ar skol, tachenn ar vicher hag an Emgleviou-micher, tachenn an darempredou hag an ebatou.

O Mater Patriæ, pedit evidomp, santez Anna, patronez hor bro, deskit d'eomp pedi ervat ha poania kalonek, m'hon devezo gant sklerijenn ha nerz ar Spered-Santel evel diazezour ar Bleun-Brug, eur Spered lemm, eur galon domm e servij hor Zalver hag an Iliz, e servich Breiz hag ar Vretoned, ma teuy da wir, **en hor vuhez pemdeziek**, komzou ar c'hantik a blij d'eomp kana :

« Da feiz hon Tadou koz, ni Paotred Breiz-Izel,  
Ni zalc'ho mat atao...  
Endro d'he banniel, ni holl en em stardo...  
Evelse bezet graet... »



## AN HIENT HIR !

*d'an Aotrou Perrot*

Hir 'm eus kavet an hent, 'n eur bignat gant ar menez,  
O soñjal en darvoud degouezet ker buan !  
Ouz glac'har na daerou, an Ankou ne ra van ;  
An torfedour a laz, da sul 'vel war ar pemdez !

Hir 'm eus kavet an hent, war gribenn zu ar menez,  
Hast ganin, ken na oa, da welout an HINI  
E oa digor d'an holl e galon hag e di,  
Ha goude rei e boan, a ginnigas e vuhez.

Henoz al liorzic a zo trist 'vel eur vered !  
Ouz diri eur c'halvar eo heñvel an diri ;  
Teurel a ra an nor garmou 'n eur zigeri...  
Da glask va Mestr ez an, evel eun dén pennfollet !

Emañ en e c'hourvez, aze war ar mein yén,  
'Vel eur paour kêz merzer tennet diwar eur groaz ;  
Diouz e dal gwenn ken kaer ar gwad a ziver c'hoaz ;  
Siwaz ! ya, maro eo, peogwir ne vousec'hoarz kén !

Daouzek a viz Kerzu ! Mibien vat Breiz ! Arc'hoaz,  
Gant ar c'helou fromus 'vo rannet ho kalon ;  
Kollet hon eus eun tad, eur breur hag eur mignon !  
Avel fallakr a yud ! Hag an hent 'zo hir c'hoaz.

N'eus forz ! War ar menez, ar brug skornet ha sec'h,  
A vleunio d'ar maré ken kaer ha diagent.  
'N Hini 'ouelomp d'ezañ a zo e-touez ar Zent !  
War roudou hon Tadou, d'e heul kerzomp dinec'h.

**Evñig Penn ar C'hoad.**

# Hon Tad Santel ar Pab hag ar zevenadurioù

Hon Tad Santel ar Pab en deus graet eur gaozcadenn d'ar 7 a viz Ebrel diweza d'ar vedisihed eus ar broioù latinek. Setu amañ eur pennad anezi :

*« On a coutume de distinguer chez les peuples civilisés divers domaines culturels, où se retrouve une manière typique de penser, de juger, de sentir et d'agir. Nous pouvons ainsi définir une aire culturelle latine anglo-américaine, allemande, slave, sans parler des civilisations des grands peuples de l'Asie. Ces domaines culturels, il ne faut pas croire qu'ils naissent d'abord d'une volonté de s'opposer à d'autres cultures, en se condamnant par là à un isolement dangereux ou du moins, à un appauvrissement regrettable. Ils expriment bien plutôt les caractères d'un peuple ou d'un ensemble de peuples, la manière dont ils développent leur patrimoine commun et assimilent au contact d'autres cultures, ce qui leur vient du dehors. Chaque culture reconnaît volontiers, sans rivalités mesquines, la présence des autres là où elles lui sont supérieures et n'hésite pas à les imiter et à recevoir d'elles ce qu'elles ont de valable, mais chacune aime et cultive les traits qui lui sont particuliers, précisément parce qu'ils lui appartiennent en propre et qu'elle y reconnaît sa marque distinctive. »*

Ker buan all en defe Hon Tad Santel ar Pab graet meneg eus ar zevenadurez keltiek e-kichen ar re all, latinek, saoznek, alamanek, slavek..., skourrou savet war an hevelep keñf indo-europeaneke. Siwaz ! mar deo bet bras, eur poent 'zo bel, levezon ar zevenadurez keltiek, ec'h ouzomp ervat eo disterraet pell 'zo. Ar pezh a lavar Hon T. S. ar Pab a zell kement, koulskoude, ouz ar zevenadurez keltiek hag ouz ar re all.

Mar deus, dre ar bed, lies stumm a zevenadur eo ablamour m'en deus pep poblad tud pe pep rummad pobladoù, perzioù d'ezañ e-unan ; dre 'n abeg c'hoaz m'en deus pep poblad eun doare d'ezhi hec'h-unan da ziorren ar pinvidigezioù speredel hag arzel fiziet enni gant Doue : eun doare d'ezhi hec'h-unan ivez da bere'henna ar pezh a vat he deus kavet er zevenadurioù all evit ober anezo danvezioù nevez diouz he spered hec'h-unan.

Pep poblad tud he deus an dever da viret na dafe da fall ar pinvidigezioù fiziet enni. Arabat eo gortoz e teufe pobladoù all d'he zikour, siwaz ! dreist-holl en hon amzer, e lec'h m'emañ pep-hini o klask gwaska ha moga ar re all. Ouspenn, ha goude ma vefent tuet mat petra hellfent da ober ? Gwelet ez eus bet broadoù pinvidik o sikour re all paouroc'h da zerc'hel en o zav ilizou kaer lakomp, pe zavadurioù all evel-se ; ar pezh a zo aes awalc'h da ober evit traou danvezel — awalc'h eo kaout arc'hant ha beza troet da rei — a zo diaesoc'h, avat, evit ar pezh a zell ouz sevenadur doun eur boblad. Eus an diabarz, gant bugale ar boblad end-eeun, eo e vezo savetaet ha n'eo ket eus an diavaez gan tud estren. Ar zevenadur keltiek a vo savetaet gant ar Gelted pe ez ay da get.

N'en deus poblad ebet na den gwir da vouga eur zevenadurez. Seurt torfed a zo bet klasket ober diwar goust pobladoù bihan evel pobladoù ar Vretoned pe an Iwerzoniz ; pe diwar goust pobladoù paour ha deuet war adreñv evel pobladoù koz Afrika pe Amerika. E meur a lec'h zoken n'eo ket klask nemetken a zo bet graet met dont a-benn. Eun torfed euzus a zo bet graet enep tud ar pobladoù-ze hag enep mab-den e-unan.

O veza m'eo ar yez diazez starta eur zevenadurez, ouz ar yez eo ez eus bet klasket afer evit he moga da genta.

Pep sevenadurez, hag hi dister, he deus gwir da badout, gwir da vont war araok. N'hell ket ober gaou ouz ar re all dreizi hec'h-unan. En eur c'hoad ne ra gaou ebet ouz ar gwez bras ar gwez bihanoc'h pe ar strouez a zo en o zouez ; ar c'hontrol eo, evel eur vagadurez int evit ar gwez bras.

Ar zevenadurezioù disheñvel n'int ket graet evit enebi an eil ouz ebén, evit kae an eil ouz ebén. Eur zevenadurez hag a vefe evel-se troet a enep ar re all a vefe kondaonet da jom hec'h-unan, da baouraat tamm ha tamm ekeit ha m'az afe ar re all war araok.

Pep sevenadurez a dle anzañ, hep gwarizi, ez eo ar Zevenadurezioù all gwelloc'h egeti war dachenn pe dachenn ; ha neuze, hep chom da nec'hi, mont d'ar skol ganto ha kemeret enno ar pezh a dalv ar hoan. N'eo ket dinerza a ray en doare-ze met startaat ha pinvidikaat.

Evidomp-ni Bretoned eo sklér ar gont evel evit pep poblad.

Diorren eus hor gwella ar pezh a zo d'eomp, hon herez broadel.


Derc'hel d'ar brezoneg, diazez starta hor zevenadurez ha banniel beo hor broadelez.

Rei da anaout d'ar bed ar pezh a zo d'eomp evit m'hellou ar pobladoù all tenna o mad anezañ.

Selled dreist harzou hor zevenadurez hon-unan ; hag hep mez na diegi en em vataat eus ar pezh a zo mat e lec'h all.

Evel-se e sikourimp kas da benn planedenn hor poblad.

V. Favé.



Taolenn ziweza Bleun-Brug Landi, dirak porched an iliz.

PHOTO JOS LE DOARE.

# Eun droiad e Bro-Eire

Gwelout eur wech en e vuhez Bro-Iwerzon, c'hoar hor Breiz, setu eur c'hoant hag a ziwann ez-natur e kalon pep gwir Vreizad.

Ar c'hoant-se hon eus sevenet e penn-kenta miz Eost : mont da weladenni ar Vro C'hlas, bro Sant Patrik, ar vro e-lec'h ma karer kement al liou gwer, liou an esperañs, dibabet da liou broadel.

Berr e vezo koulskoude ar pez hon eus da zisplega, rak ne c'haller ket beza nag helavar na gouizieq war eur c'hornad douar tremenet ennañ c'hwec'h devez hepkén. Ouspenn, n'hon eus ket gwelet Iwerzon en he fez, met hepkén al lodenn adkavet ganti he frankiz 35 vloaz zo, e 1921 : Bro-Eire.

Eire a zo lodennet e 26 Kontelez : n'ez eus nemet 6 rann-vro en Ulster stag betek-heñ ouz Bro-Saoz. Kerbenn Republik Bro-Eire eo Dublen. Ar porz-brasse, dastumet ennañ eun hanter million a dud, eo hon eus gwelet dreist-holl. Hag ar pez en deus sachet dreist-holl hon evez eo bet buhez relijiel an Iwerzonidi.

Kelted Bro-Eire a zo holl katoliked : 95 war 100 — katoliked hag a garg c'hoaz o ilizou — evel ma weljomp a-vec'h stoket hontreid ouz Enezenn ar Sent.

Seiz eur e oa diouz ar beure, pa baras hor sellou, er peilder, war eul lodenn eus ar c'hlec'h, menezieq hag a c'houdor kompezennoù glas diabarz ar vro. Treuzet hor boa, e-doug an noz, gant kalz a boan Mor Iwerzon, start ha start gant beajourien a gantou, bec'h d'ezo kaout eur c'hornig bag da azeza pe d'en em astenn. Al lestr hag a savas an eor e Liverpool a oa koulskoude bras-kenañ.

Ar pez a glask da genta eur Breizad, boazet ouz kloc'hdiou kaer hag uhel e vro, eo touriou ilizou. Seurt savadurioù ne skoont ket an daoulagad pa erruer a-wel da borz Dullen. Arabat disoñjal, evel ma lavare d'eomp eur beleg iwerzonad, ez eo bet gwasket kriz katoliked iwerzon gant protestanted Bro-Saoz.

Ar sul a oa hag edomp o c'hortoz klevout, evel e Breiz, boleou bras ar c'hleier oc'h embann d'ervez meur an Aotrou, met trouz ebet ne dregernas en hon diousskouarn. An holl straedou a oa beuzet en eur sioulder vras. Ar stalioù-kenwerz a oa holl prennet. Gwazed, merc'hed, bugale, leoriou-oferenn en o daouarn, en em hasté warzu an ilizou. Henc'hët gant treminidi hegarat — atao ez eo bet evel-se epad hor beaj — ec'h errujomp e iliz Sant Andre evit oferenna. Eun iliz, savet evel ar pep brasa eus an ilizou all, tal ha tal gant tiez ar straed, tour ebet warni, delwenn an abostol hepken uhel a-us d'an nor vras. Eus skiñvier koat kaer, heb beza nec'het gant pilierou, an dud fidel a c'hell heulia mat al Lidou santel. Leun-tenn e oa ar santual hag evel-se emañ bep sul evit pep oferenn, lidet bep hanter eur eus c'hwec'h eur betek kreisteiz.

O welout ar gristenien-se, koulz lavarout holl, o tibuna o chapeled, kemeret a-grenn gant o fedenn, e sav soñj d'eomp eus an ilizadou tud a weze gwelet bep sul e pep parrez a Vreiz, hanter-kant vloaz 'zo. Hag hon eus soñjet er stad m'eo kouezet hor Bro garet : pell emañ bremañ warlerc'h hor breudeur Tra-môr.

An oferennou-se evelato ne vezont ket « renet », evel ma vez klasket ober dre amañ abaoe eun nebeut bloavezioù evit lakaat ar re vadezet da anavezout gwelloc'h ar Bibl Santel ha d'en em unani gant pedennou an oferenn. Netra a gement-se : oferennou sioul a-grenn. Met damdost evito holl ne 'z eus ket a oferenn hep-komunion ha war ar pemdez ez eo heñvel.

Euriou a zo merket evit mont da govez ha ne vez ket klevet storlok prenestrou ar c'hadorioù-kovez epad an ofisou. Ar c'hadorioù-mañ a zo teir dor vat warno. Ar Gelted n'int ket tud da skuilha d'ar pevar avel, evel al Latined, traou o spered hag o c'halon. E Bro-Spagn, da skouer, e lavarer ar pec'hedou hag e roer an absolvenn a-wel d'an holl e kadorioù kovez digor.

Goude ar gomunion e prezegenner e saozneg hag ar beleg oferennner a c'hortoz fin ar brezegenn evit rei e vennoz. War ar zizun, ez eus oferennou eus 7 eur hanter — an Iwerzoniz ne zavont ket abred — betek 11 eur. Goude an oferenn-mañ e roer bennoz ar Sakramant. Amzer o deus rak ne leiner nemet da 1 eur hanter. Iskiz eo stumm an dilhad-iliz : n'o deus doare ebet : e-grenn a c'hiz koz. Gwiskamañhou ha skeudennou divalo keñan : arz Sant Sulpiz a ren e pep lec'h, atao mestr nemetañ e Bro-Iwerzon.

Ar veleien ne zougont ket o zoutanenn nemet en ilizou. Anavezet mat e vezont koulskoude, er-maez, dre ma tougont dilhad du, eun tok du hag eur c'holier gwenn, stag outañ eur chignenn zu (plastron). An eskibien a zoug eur c'hreumpez glas-ruz (violet). Saludet e vezont koulz lavarout gant an holl : en eur dremenn, eur sav-dourn warzu ar penn hag eur mousc'hoarz.

Korf ar C'hrist n'eo ket miret e armell sakr an aoter vras, met war eun aoter vihan. Se hon eus merzet ivez e Bro-Saoz en ilizou protestant, met er santualioù « english catholic » hepkén — saozneg katolik — tost kenañ ouz an iliz katolik roman. E kêr Londrez, ez omp chomet bamet o welout pegen dereat e oa stad an ilizou-se, dreist-holl an aoter, gant eun toullig er voger, e lec'h ma kredont mirout ar Sakramant santel. Goulou, bleunioù, danveziou kaer, arrebeuri lugernus : eun dudi da welout ! Hag hon soñjet ennomp hon unan : Daoust ha klask a reomp-ni lakaat ken kaer al lec'hioù ma chom enno Jezuz Krist e gwirionez ?

N'hon eus klevet ano ebet eus an oferenn-bred, eus an oferenn war gan, nag eus ar gousperou.

D'an abardaez, war-dro eiz pe nav eur, stank ha stank e vez an Iwerzonidi a dremen dre o ilizou : micherourien gant o dilhad labour — ar pez a zigase soñj d'eomp eus Matt Talbot an douger-sammou, hag a bigno eun deiz war an oterioù — paotred, merc'hed yaouank... Daoulina a reont alies tost d'an nor, evit eur bedenn virvidik pe ober a reont Hent ar Groaz, herr warno. En em deuler a reont gant kréd e-harz treid ar Sent : Sant Jozef, Sant Anton, an Itron Varia : dreist-holl taolenn Sant Alphonz a Ligor : Gwerchez ar Skoazell Gendalc'hus (N.-D. du Perpétuel Secours). Goulou e podigou a liou a'zev hep ehan dirazo.

En em erbedi a reer ivez kalz ouz Sent koz ar Vro. Niverus evel e Breiz : int-i eo o deus, evel amañ, furmet korf hag ene Iwerzon : *Sant Kolomban, Sant Brendan, Sant Senan, Sant Kolm* ha dreist-holl *Sant Patrik ha Santez Berc'hed*, tad ha mamm ar Gaeled. Ar c'harr-nij hon digasas e teir eur eus Dullen da Roazon a zouge ano eur sant : *sant Deklan, Sant Ronan* a weljomp merket e lizerennou keltiek war unan all. D'an holl nijerien, da heul kelaouennou ha kazetennou, e vez roet eur bedenn da gas warzu an Aotrou Doue, evit goulenn digantañ diwall pep hini diouz pep darvoud e-doug an nijadenn.

Ar Breuriezou en em zispak skedus war Zouar Iwerzon, evel gwechall war zouar Breiz. Evit hen gouzout, awalc'h eo sellout mat ouz peultrin ar merc'hed, ouz chupenn ar wazed hag ar baotred yaouank. N'o deus ket mez o tougenn arrouezioù relijiel, hini Trede-Urz Sant Fransez, dreist-holl hini ar Galon-Sakr. « Youlerien ar Galon-Sakr » (les volontaires du Sacré-Cœur) a zo bet diazezet gant an Tad Matthew (Maze) Fransizkan, evit stourm ouz ar vesventi, tech fall an Iwerzonad. 400 mil a zo anezo, touet ganto chom hep eva heradenn alkool ebet evit digoll Doue eus pec'hedou ar vesverien ha mirout ouz ar ouenn da vont da netra. Ha koulskoude n'hon eus gwelet den mezo ebet epad hor beaj ha war an taolioù ne lakaer evit ar predou nemet dour ha té. Petra ne dlemp ni ket ober, ni Bretoned hag a glask uhelaat hor pobl, evit diframma eus islonk an alkool diaoulek, hor c'henvroidi gwall daget ha gwall vrcinet.

An holl a oar ivez eo Dullen kavell « Armead Mari » (la légion de Marie). Didrouz eo abostolerez ar Strollad-mañ met puilh eo an eost a ved dre ar bed-holl. En eur vont hag en eur zont a-dreuz Dullen, souezet omp bet o welout kement a ilizou protestant eus ar re vrasa en eur gêr kon katolik « eur gêr e

stad ar c'hras » evel ma vez lavaret. Eur person, ganeomp er c'harr-nij en hent warzu' Lourd, hon dinec'has. « An ilizou-se, emezañ, n'int nemet savadurioù, bernioù meñ, dén ebet o tremen o zreuzoù — korfoù diene ». Koun hepen eus eun amzer c'hoaz tost — eun amzer garo ma klasked gant nerz distaga ar vro diouz ar wir iliz. Met ar Sent koz o doa mansoñet eun diazez divrall.

Eur gêr evit kloza, diwarbenn ar yéz. E pep lec'h en em led iwerzoneg dirak an daoulagad : war an tiez, war ar skritelloù-bruderez, war skritelloù ar strae-dou, war ar peziou-moneiz, zoken war dikedoù ar c'hirri, a ya hag a zeu dibaouez a-dreuz kêr. Met eur yéz skrivet hag eur yéz desket n'eo ket atao eur yéz veo da lavarout eo komzet. Tamm iwerzoneg ebet ne dregernas morse en hon dioueskouarn : bepred saozneg. Ar vugale a oar, met n'o c'hlever ket o komz gouezeleg kenetrezo. Ha ni hon eus soñjet ne oa ket c'hoaz Bro-Eire digabestr, dieub a-grenn. Valera en deus lavaret : « *Ma vefe roet d'in da zibab etre ar frankiz hag ar yéz, e tibabfen ar yéz* ».

Moualc'h ar Sklerder.

## EMBANNADURIOU

### Levriou nevez.

Nevez resevet hon eus digant Maodez Glanndour « Levr ar Furnez », eur c'hendalc'h eus troidigez ar Bibl.

Roneoskrivet eo evel al levriou all deuet en e raok. Hor mignoned a vo laouen, a-dra-sur, o kaout al levr-se en o levraroeg. Skriva da : D<sup>in</sup> de St-Gall, 48, rue des Salles, Guingamp. Nao-ugent lur ar pez ha 30 lur mizou kas, ouspenn. (Goulenn digant ar memes hini : Aviel St Yann, Aviel St Vaze, Koheleth.)

« Beo ha yaouank kenañ e chom levr ar Furnez, ken kaer pa zispleg d'eomp priz neñvel ar vuhez, tec'hadenn herrus an euriou, ar ret ma 'z eo ar stourm, faezidigez asur ar re fall ha splannder trec'h ar re reiz. En eur bed troet endro da azeuli an danvez, ar mac'homerez hag an tiranterez a bep seurt, e kendalc'h bepred ar Furnez da youc'hal d'eomp ez eus evit ar justis hag ar mad eun difenner nerzus a ro gopr evit gwir d'e zervicherien en divarvelez, hag a oar ivez, a-dal bremañ, d'an eur divizet gantañ skei garo gant an droug ha beza dialour. » (Digoradur Levr ar Furnez gant M. G.)

Degaset ez eus bet d'eomp c'hoaz e kerz miz Gouere, daou levrig koant kenañ ha nevez flamm :

Jeanne Moret : *Saint Yves*, celui qui plaide notre cause au ciel.

Marteau de Langle de Cary : *Saint Hervé*, le barde du Seigneur. 75 pajenn pep-hini. Priz al levr 260 frs. Franco 290 frs. Cartonné : 380, franco : 410 frs.

Evit kaout al levriou, skriva da : Editions et Imprimeries du Sud-Est, 46, rue de la Charité, Lyon.

### Diskou brezonek.

Goulennit digant an Ao. Abjean, kure e Landivizio, an diskou brezonek savet diwar Kanaouenou e Laz-Kana.

10 a zo anezo : 1 : Bannielou Lambaol hag an Tri Angelus — 2 : Luskell va bag ha Spered Santel — 3 : Pe trouz zo war an douar ha Noz Nedeleg — 4 : Patronez dous ar Folgoat ha Dale'homp sonj — 5 : Ar pilhaouer hag ar Yarig wenn — 6 : Glenan ha Klammigan ar Varc'heien — 7 : Ar Baradoz hag ar Purkator — 8 : Bro goz, Alan al Louarn ha Son ar Yar — 9 : Kenavo ha kendalc'homp — 10 : An diou Vreiz.

## Petra 'ra pinvidigez an dén

Priz kenta ar prezegerez evit ar merc'hed :

Jeanne-Yvonne LETTY, Gwiseni.

Va C'henvroiz ker,

Ar bed, hirio evel dec'h, en deus ezomm kalz muioc'h eus a furnez eget a ouiziegez.

Bez en deus ezomm eus tud a galon, eus tud a volonteiz nerzus, eus sperejou digor, eus eneou splann hag uhel. Bez en deus ezomm eus gwa-zed ha merc'hed a zo gouest da sevel o daoulagad a-ziwar o afferioù evit gellout tenna ar furnez eus al lec'h ma vez kavet.

Arabat lezel hon daoulagad da veza trellet gant eur goc'hen a guz alies nebeut a dalvoudegez. Ar bras eus an dud a varn o breudeur war an diaveaz hepkén. Lakaat a reont e renk tud disheñvel ar re o deus gelllet sevel e pazen-nou ar vuhez, pe dre o nerz, pe dre o gened, pe dre o gouiziegez, pe c'hoaz dre o dañvez

hag an enorioù. Maged ha netra kén ! Evel eur soroc'hell, an distera stokad a zo gouest d'o lakaat da vont da netra. Pinvidigez an dén n'eo ket war seurt traoù ken didalvez eo emañ da veza diazezet. Evit barn dereat eun dén n'eo ket war e zañvez, war e c'hened, war e ouiziegez nag war e vrud hag e nerz e tleer poueza.

Eun dén a hell beza pinvidik mor, met kaout nebeut a dalvoudegez hag a skiant. Estreget kig ha kroc'hen a zo en dén : en dén ez eus eun ene, eur spered, eur galon ha kaer 'zo, na dañvez, nag aour n'hellont kemeret o flas.

Kredi eo ar gened, an nerz, traoù ret a zo ken diboell all. Kaer zo lakaat anezo e renk doueou ar bed e chomint ar pez a dalvont ha netra ouspenn : lorc'hentez eun derv a vez kavet ive en anevaled a zo endro d'eomp. Gouiziegez a zo mat da gaout, met gouiziegez hepkén a c'helle disec'ha ar galon, pa deu da serra an ene hag ar spered war kaerder ar bed, war galloud an Aotrou Doue.

Petra 'ra neuze pinvidigez an dén ?

Talvoudegez an dén, e binvidigez a zo da glask da genta en diabarz. Ret mat eo rei ar plas kenta d'an ene, d'ar spered, d'ar galon, ober outo ar voedenn hag ar greizenn eus pinvidigez an dén.

Eun dén a hell beza disheñvel gant nebeut a zeskadurez, gant ma vo digor e spered, gant ma vo frank e galon, gant ma ouezo tenna ha dispartia ar pez a zo ret ha mat. E peb dén o kaver pinvidigezioù a bep seurt. Ret eo ober eun dibab a zoare en o zouez evit ma talvint eun dra bennak.

An dén a zo evel eun tachad douar. An douar a c'hell beza pinvidik anezañ-c'unañ. N'eo ket awalc'h. Ret eo c'hoaz e gempenn, e drempa, lakaat ennañ an drevajou ouz ret, tenna dioutañ al louzou a zo gouest da vouga an drevad, hada greun mat, beilha warno, ha neuze hepkén e c'heller gedal eun eost founnus ha kredi eo pinvidik an douar.

E peb dén ive eus peadra a c'heller lakaat da dalvezout, gant ma vint renket mat, gant ma vo tennet diouto ar saour int gouest da rei e poent hag en amzer.

N'eo ket dao bezet pell er skol evit beza dén a zoare. Ar vuhez a zo eul leor ha pa ouezer e lenn hag e gomprenn, a zo gouest da rei da bep hini ar furnez hon deus ezomm. Arabat barn eun dén war ar pez n'oar ket, met war ar pez a oar ha war an doare d'her gouzout.

Pinvidigez an dén a zo da denna eta eus an diabarz, eus an ene, eus ar spered, eus ar galon da genta. Ha talvout a raio an dén ma oar lakaat urz vat hag en o renk an holl dañvez a zo kuzet ennañ. Neuze ha neuze hepkén e c'hell beza din eus an hano a zén.

*Hor mignon, Mab an Dig, a zo o paouez digas d'comp eur  
zac'had kontadennoù diwarbenn « Saout » bet anavezet gantañ.  
Envorennoù bugaleaj, enno leun a draou fentus ha kentelius, a  
raio plijadur d'hon holl lennerien. Mil bennoz Doue d'ezañ !*

## SAOUT LAMBAOL

Ar re all o doa leun a draou : kezeg, moc'h ha saout.  
Ha me n'em boa netra.  
Eo ! eur paourkezh kaz, devet e vleao war e benn adrefiv, atao puchet e toull  
al ludu,  
Ha me am beze riu alies, rak n'em boa ket a zilhad tomm, ha pa glasken kemeret  
e blas, e lugerne e zaoulagad hag e zent. Pet gwech n'en doa ket lammet ouzin, an  
targaz marellet ?  
Droug en doa ouzin, ha me kemend-all outañ.

Ar pezh am bije karet kaout 'oa eur vioc'h, unan wenn ha ruz heñvel ouz Metig  
ti ar C'hopi.

Met va mamm-goz n'he doa kraou ebet d'he lakaat. N'he doa ket a rabez, nag a  
velchen da rei d'ez, park ebet da beuri — eur c'hoz tamm liorz hepken, e Toull an  
houidi, hag, aes d'eoc'h gouzout, n'oa ket d'ez a leve !

Va mamm-goz a ranke mont da glask laez ; laez diennet, ha diennet mat, ne gaved  
nemet er C'harpont, e Kelou mat, hag en eun nebeut tiez all, a zo bet enno atao tud  
karantezus e keñver ar paour.

Pa z'aen ganti da glask laez, va fijadur oa mont, nann da welout ar c'hezeg —  
Ar c'hezeg 'zo yud, ha yudazerez a-walc'h a veze graet d'in, a-hent-all. — Met  
da welout ar saout. « Hagn, hagn », emezo en o c'hraou gouestad, gouestad, evel o  
chaokat « Chewing-gum ».

Me a rae d'ezo allatig, a gomze d'ezo goustadig : « Nag eo bras da dez, hirio,  
Lanniliz, ha te Melen, n'out ket aet e breskin ? Brëndu, perak e sellez ouzin, evelso ?

Ano Saout Lambaol, holl m'her gouie !

En o daoulagad, melen-gwer, me a gare chom pell da sellout, evel en eur  
mellezour !

Melezourioù sebezus, nag a draou a welen enno !

Va spered a nije pell diouz an douar. Ne gleven mui natre. An amzer a dremene  
dudius !

Beb an amzer eur vioc'h a roe war va dorn eun taolig gant he zeed bras, ruz  
ha gwenn.

Nag e oan laouen gant eur seurt merk a garantez !

« Bielig, e pelec'h emañ adarre ? Gant ar saout, aes eo gouzout ! Eun deiz  
bennak e vi breset, Diveinch ! »

Va Non he doa bet he banne kafe, he doa kontet marvailhoù da Zoaz, pe da Vari !  
Ha bremañ hast war he c'horf, e oa mall ganti mont d'ar gêr.

Ar pezh sebezusa, ha n'her c'homprenan ket c'hoaz, eo, war an henchou hag er  
parkeier, e teuen da gaout heñvel pennoù ar saout ouz pennoù tud o ziegez.

War lod e welen ar Vadelez — war lod all ar fallagriez !

Evel ma teufe ar Vad hag ar fall a zo en den d'eh em astenn betek war e jatal !!!

Pa veze brao an amzer ha berr ar peuri, saout ar « Penn an Traoñ » a veze kaset  
d'an tevenn hag ar vugale d'o diwall.

Eno ec'h en em gave saout ar Vourc'h, saout an Ti Kamm, saout Kerzivoret, ha  
re all c'hoaz eus a belloc'h.

Alies, dreist-holl e penn kenta an hañv, e veze tourterez.

Ar saout 'zo evel an dud. Unan a rank beza e penn evit ren ar re all !

Ar greñva eus ar saout a veze anavezet ganto evel rouanez !

Hag an holl a zente !

Peur gourvez ?

Ar rouanez hepken a c'halle her c'hemenn.

An dud ive — zoken ar re vihan — a zo evel ar saout.

N'o deus ket a gerniel — met eun teod o deus, divrec'h ive...

Ar vugale a-wechou en em gleve. Neuze e veze laeret eun nebeut avalou-douar.

Gant kaoc'h-kezeg hag askol e veze enaouet eun tantez hag ennañ poazet patatez !

Nag e oant mat ar patatez-se !

Sec'hed a roent avât, met harp er Ribl e oa eur feunteun, dour sklaset o ruilh  
anezi.

Eus palv hon daouarnigoù e rae glougou en hor c'hornailhen !

Nag a c'hoarz ! nag a blijadur !

A-wechou, ral koulskoude, etrezomp e save kannou !

Met pa welemp bugale eus a Borsal pe eus a Sant-Pabu, neuze, avât, ec'h en em  
glevemp hag ar vein a zute !...

Etrezomp kaoz a save gwehennoù. Pep hini a veule e draou, e zaout dreist-  
holl, pegwir edont aze dirak : « Va re d'in-me a zo lartoc'h eget da re-te ! — Va met  
gant va re-me e vez muioc'h a laez, muioc'h a amann ! »

Me n'em oa netra da lavaret.

N'hon doa ket a zaout ha n'oan ket pinvidik. Eur wech e oa lavaret d'in brao :  
« Te, serr de c'hlapez, en da gêr-te n'eus nemet tousegi ! »

Met lod o doa kalon vat. Atao int chomet mat hag hirio, p'o gwelan, e kan, en  
va c'halon, eñvor deizioù kaer an tevennoù !

A-wechou, epad ma vezemp o rodella etouez traez an tergin, pe o klask paka  
peskedigoù er c'houerenn, unan a youc'he :

« Ar zaout e breskin ! »...

He lost sounn en êr, Kerlerc'h, rouanez ar saout, a zaoulamme etrezek Sant-Pabu.

War he lerc'h, ne welemp nemet lostoù, etouez koumoul an traez a strinke uhel,  
a bep tu.

Ar re vrasa a denne, a-benn-herr, o boutou hag a rede war o lerc'h.

Met al lostoù, den n'o gwele mui !

Ar saout a voe kollet !

Betek an noz, war douar Sant-Pabu, ni o c'hlaske !

D'hon tro, e pakemp mein, hag oc'h en em gaout er gêr, diwezat, gant saout  
dilaezet, lod a bake ar wialenn !

Me ne baken nemet traoñv.

Em gwele paour o voredi me a gave d'in gwelout lostoù-sounn en o sav, o  
fringal, hag e tirollen da c'hoarzin.

Mab an Dig.

(Abenn ar miz a zeu : Siboud, bioc'h Job Meskam.)



## A TRAVERS LA PRESSE

La presse n'a pas ménagé la pellicule à l'occasion de ce Congrès du Cinquantième. Les textes furent moins abondants ; très bref, celui de Ch. Chassé dans le « Télégramme ». Impressionné tout de même par le jeu scénique de Coat-Mez « qui constituait un extraordinaire « Tro Breiz » panoramique, dont chaque moment mériterait une mention spéciale, et qui fait le plus grand honneur à de Parades, » et par la « procession colossale qui se dirigea vers Landivisiau ».

Gourvil, de l'« Ouest-France », passa une bonne soirée à Kerjean. « Ceux qui voyaient pour la première fois cette pièce magistrale où la patine du temps a parfait l'œuvre des architectes inconnus du XVI<sup>e</sup> siècle, on peut imaginer à quel point le travail des hommes, la collaboration des siècles et du climat, ainsi que les jeux de lumière artificielle, put porter leur émerveillement »...

« Ce fut un spectacle singulièrement prenant que celui de myriades de petites flammes, ponctuant la nuit calme, des pelouses et de l'avenue au chant du cantique « Ar Baradoz ».

Le lendemain, Gourvil resta insensible à l'atmosphère particulière de ce Congrès, le soleil l'a incommodé et son texte est marqué par la lassitude des spectacles, l'exiguïté des tribunes d'honneur...

Fontaine, dans la « La Croix de Bretagne », moins habitué sans doute, a goûté les spectacles de Landivisiau « étonnante rétrospective » et de Kerjean qui « eut cette qualité rare d'être sobre et de ne montrer que des chorales excellentes, des costumes frais, des danses qui nous parurent inédites »...

Une équipe envoyée spécialement de Paris réalisa pour « Jours de France » (numéro du 13 Août), un reportage au texte insignifiant ; Landivisiau fut pour eux « une féerie de dentelles et de velours, de coiffes et de rubans ».

« Il y aurait lieu d'être satisfait si la présentation à grand tra la la de la presse régionale, dit « Ar Soner » du 15-8, ne servait à camoufler des silences pour le moins curieux »... « Pour un peu, le Bleun-Brug passait pour être né de père, inconnu ».

La « Semaine Religieuse » de Quimper (26-8), sous la signature de F. Falc'hun (Rennes), est plus explicite :

« Le nom de l'abbé Perrot, que le Bleun-Brug ne pouvait oublier en ce cinquantième, a été naturellement évoqué par la plupart des orateurs et conférenciers, ce que n'ont guère laissé deviner les comptes rendus de la presse, par ailleurs objectifs et sympathiques. Cette consigne du silence sera difficile à justifier et à maintenir, après les documents publiés par M. l'abbé Poisson dans la biographie qu'il vient de consacrer au fondateur du Bleun-Brug. D'autres encore sont annoncés, et l'on peut espérer que justice sera bientôt rendue à la mémoire d'un prêtre dont le caractère passionné ne saurait faire oublier ni le désintéressement total ni la parfaite droiture. »

De toute la presse à gros tirage, seul Pondaven (« Bretagne à Paris ») avait eu le courage d'être honnête : « Ce qui restera de plus marquant du Cinquantième du Bleun-Brug... est l'essai d'établir la vérité sur la disparition tragique de son fondateur, l'abbé Jean-Marie Perrot ».

Dans le même journal, Maître Paul Le Flem tire la leçon du Concours de chorales : « Le Breton pourra, quand il le voudra, se mesurer avec les meilleures chorales de France et de Navarre ».

Bien au-dessus de toutes les relations de la presse quotidienne, l'article de Le Dui-gou dans le « Progrès du Finistère » du 7-8, le Congrès de Landivisiau est l'occasion de dire ce qu'est pour lui le Bleun-Brug, « vieux d'un demi-siècle, jeune d'avenir » et ce qu'il en espère. Nous regrettons de ne pouvoir le publier in extenso.

« Le jour où la langue bretonne, le goût d'un costume personnel, l'affection pour nos vieilles maisons, nos vieilles chapelles auraient disparu, et plus que cet amour pour le patrimoine du passé, le désir de continuer, de l'enrichir en le renouvelant, ce jour-là la Bretagne sera une pauvre terre rabaissée, privée de tout relief, nivelée dans la platitude, comme il n'en est que trop en France et dans le monde. »

H. an Du.

## K E I L I E I I E R

### Kañvou.

Erbedi a reomp ouz hon lennerien, ene an Ao. Louis Bourhis, diazezour goueliou Kerne, aet da anaon er miz tremenet.

Karet a rae ar brezoneg, hag ar garantez a zouge d'hor Breiz eo a lakeas da ziwan en e spered ar c'hoant da enori e vro dre sevel Goueliou Kerne, a zo deuet da veza kaera goueliou a oufed da weled.

Plijet gant e vugale hag e vugale vihan digemer amañ hor gourdehemennou a gañv.

### Kan ha diskan.

Eun devez bras kan ha diskan a vo e Poullaouen d'an 30 eus ar miz-mañ, evel ma 'z eus bet dija, warlene.

Diouz ar mintin, azalek 10 h. e vo kenstrivadegou gant 30.000 lur a briziou.

Da genta e vo klevet gwella kanerien Spezed ha Poullaouen bet loreet warlene : kenta priz : 4.000 lur — eil : 2.500 — trede : 1.500 — 4<sup>e</sup> : 1.000.

Goude e vo kanaouennou a unanou : 1.000 lur — 500 lur.

Kontadennoù : 2.000 lur — 1.500 — 1.000.

E pep hini eus ar re-mañ e vo daou rummad : re goz ha re yaouank.

Bez' e vo ive eur genstrivadeg displega evit bugale : 1.000 lur ar priz kenta. Leoriou d'ar re all.

Da 14 h. : Abadenn vras kan ha diskan ha c'hoariva.

Mignoned ar brezoneg a vo e Poullaouen d'an 30 a viz Here.

### Pardon ar Sonerien.

Eun dra nevez eo bet ar pardon-mañ, e chapel Sant-Herve e Gourin d'ar 25 eus miz Gwengolo.

Echu ganto ober troiou e Breiz hag el lec'h all, fellout a reas da yaouankizou ar c'hela'hioù hag ar bagadou, en eur zont amañ ken niverus daoust d'ar glao, diskouez o deus soursi eus ezommou o ene. Millierou emaint bremañ e Breiz. Met keit ha ma 'z eus beleien distaget da ober wardro ar foot-ball, ar patro, ar skoutelezh hag all, emañ alao ar yaouankizou-mañ o c'hortoz eur beleg bennak hag a vo ivez o aluzenner.

« Ne pourrait-on pas, eme skrivagner ar « Progrès » hag ar « C'hourrier, trouver un prêtre, libre de ses dimanches, connaissant la psychologie des cercles et bagads, pour assurer cette formation spirituelle qu'ils réclament ? »

En tout cas, le pardon de Saint-Hervé dont il convient de souligner le caractère familial, vrai, dépouillé de toute parade, en situant nettement l'orientation que doit et que veut prendre le mouvement folklorique, et en posant le problème de la formation spirituelle des jeunes Bretons des cercles, est un événement à retenir.

### Kenstrivadeg ar studiade gou.

Da geñver Bleun-Brug Landi hon doa savet eur genstrivadeg dre skrid gant 15.000 lur e-giz priz kenta. Gouenn a raemp eur studiaden war ar red ma 'z eo sevel uzinou e Breiz da virout ouz ar Vretoned da zivroa.

Ar priz-se a zo aet gant an Ao. Bourdellès, kelenner e skola Lannuon.

Plijet gantañ digemer hor gwella gourdehemennou evit e studiaden vat.

Hon lennerien o devo ar blijadur d'he c'havout en unan eus hon niverennou da zont.

Eur priz all a 10.000 lur hon doa da rei. Met re zister eo bet kavet al labourioù all.

### HOR MADOVEROURIEN

Ao. Cozien, Gwilers : 1000 lur — Ao. Even, Landreger : eun bern levrioù brezonek evit Roz-Bleuniou — Chaloni Fave : 10.000 lur (eil pree) ha levrioù brezonek — Itron Maodez Seite, Kleder : 5.000 — Chaloni Montfort : 5.000 — Lusian Botorel : 1000 — D<sup>ell</sup> Hyarie : 1000 — Ao. Guilleher, Nancy : 2.000 — Ao. Croguennec, Plougat : 1000 — M. Bongrain : 5000 lur evit Kenstrivadegou ar B.B.

Chaloni Falc'hun, Roazon : 2.500 lur bep miz — Ao. Gab ar Moal : 5.000 l. bep miz — Itron ar Minor ha Y. ar Minor : 5000 l. bep miz — Itron a Rohan-Chabot : 10.000 l. bep miz — Yann Goas : 2.000 l. bep miz.

Jean Jadé : eun daol prestat evit Roz-Bleuniou — Itron Moré : eun armel-levraoueg prestat — D<sup>ell</sup> a Gervenguy : eun daol roet.

Disignou bet gant Roz-Bleuniou : Priz-feurm : 45.000 lur — Liva, papera, lakaat gaz ha dour, renka meur a dra, prenachoù a bep seurt, telefon : 205.374 lur. (Peurbact eo pep tra ganeomp ha peur renket an ti) met roll ar profou a chom digor.



# Bannielou Lambaol



1. Me 'm eus bet plijadur, e Lambaol awechou,  
Oc'h ober tro an iliz, gant an holl bannielou.

## DISKAN :

Jo po po po landibi dibi  
 Jo po po po landibido.  
 Mantur la ridondenig,  
 Jo pi rei pi ra la.

2. Hag o stoui ganto, dirak an aoter vras,  
Hag ouz o sevel kerkent er vann ken dres all c'hoaz.
3. Plijadur am beze, pa veze ar pardon,  
Oc'h ober tro ar vored, gant an dud a galon.
4. Eno veze gwelet pa groge an avel,  
Piou 'oa ar baotred wella da zougen ar banniel.
5. Ha dre ma tremenent, a bep tu d'ar vali,  
Gant o zeod flour ar merc'hed, a roe o ali.
6. Hag a rae o dibab, e-touez ar baotred vrao  
A welent en o c'haera o tremen dirazo.

(Dastumet gant H. Gwillerm.)

(Ar ganaouenn-mañ he deus tregernet kalz e-pad Bleun-Brug Landi.)